



CANTIC AR



ITRON VARIA AR FOLGOËT.

FOLGOËT.

Abrege euz an indulgeançou a eller da c'honit o visita Ilis Itron Varia ar Folgoët, accordet da berpetuite gant pevar Bap bras; SIXT IV, INNOÇANT VIII, LÉON X, JUL III, lennet, examinet ac approuvet er blavez 1633, gant an Autrou Guillerm, chaloni a viqel-vras à Léon, ac er blavez 1829, gant an Autrou IAN-MARI-DOMINIC DE POULPIQUET DE BRESKANVEL, escop Quimper, composet e guers brezonec gant an Autrou CALVEZ, person ar Folgoët, er blavez 1838, examinet, corriget ac approuvet er memez blavez, gant an Autrou JEGOU, viqel-general d'an Autrou n'escop à Guimper.

VAR DON : *Guers Lo-Christ an izelvet.*

1.
D'ar sùl araoc guel an oll Sent,
Er blavez dec-a-tri-uguent
Euz ar pevarzecvet canvet,
Compreuit-en mad, Bretonet :

2.
E tecedas Salaun ar foll,
Casseet, rebutet gant an oll,
Tretet à zot, disquiantet,
Eb croas, na belec anterret.

3.
Gouscoude e vuez a voa bet
Eur squer, un exempl vad bepret:
Yun, cousqet var an douar yen
Ac humbl goulen an aluzen.

4.
Ave Maria, emezan,
Selaouit-tà mad anezan,
Selaouit : *Ave Maria*,
Salaun a zeppre bara.

9.
E qeit a ma c'hen-em ige
Ous ar brancq guezen evel-ze,
O! ô! ô! ô! ô! ô Maria!
E vige clevet o cana.

10.
An dud divardro a grede
E ranqe bea sot an den-ze,
Ac etrezo n'er galvent oll
Partout nemet Salaun ar foll.

11.
Erfin, decedet p'er chaf-jont,
En anterri a zecid-jont
Dindan e vezen, dre n'allent qet
En laqât, emezo, er veret.

12.
Nac e binigennou calet,
Nac e orazon qer brudet,
Tra, emezo, ne doant oll
Nemet ar merq euz eun den foll.

17.
Enô da Vari eun Ilis
Batissa, oll ezint avis,
E memor ac e testeni
Ar miracl-ze græt dre enni.

18.
An duc à vreiz gant ardeur vras
De batissa en-em bressas;
An Ilis savet a zo anvet:
Itron Varia ar Folgoët.

19.
Euz ar moment-ze, cals duqet,
Duqezet, princet, princezet,
D'ar Folgoët zo deut da bardona,
A da Vari d'en-em voesta.

20.
Ac ar pez en deuz c'hoas tennet
D'ar Folgoët cals pelerinet,
Eo an indulgeançou caër
Enni qer stancq a chonezer.

25.
Ar pardonniou principalla
A celebrer en Ilis-mâ:
E mis eost, *ar sùl genta*;
Er mémèz mis, *guel Maria*.

26.
D'an eisvet à vis guengolo
E teu pelerin à bel-bro,
Ennez eo deiz ar pardon-bras:
Mari en deiz-ze a chanas.

27.
Oh pebez dudi eo guelet
Processionou caër-meurhet
O tond d'ar Folgoët en deiziou-ze,
Evit saludi Mam Doue!

28.
Processionou Lesneven,
Re Plouzeniel a Saut-Even,
Re Krouez ac an Drennec,
Ac ive re Tregarantec.

29.
Tud clan, tud infirm, impotent,
C'hoarvezet, gant an Doue...

Casseet, rebutet gant an oll,
Tretet à zot, disquiantet,
Eb croas, na belec anterret.

3.

Gouscoude e vuez a voa bet
Eur squer, un exempl vad hepret:
Yun, cousqet var an douar yen
Ac humbl goulen an aluzen.

4.

Ave Maria, emezan,
Sclaouit-tà mad anezan,
Sclaouit : *Ave Maria*,
Salaun a zeppre bara.

5.

Cetu e beden ordinal:
Credabl ne vouie hini al;
Er façon-ze, dre Lesneven,
Eo e chouille an aluzen.

6.

E chars eur feunteun, eul lochen
Savet a zindan eur vezen,
A serviche de logeiz
E pep amser, nos a deiz.

7.

Enò cousqet var ar chalet,
Oc'h imita an hermitet,
Divar bara a dour e veve,
Eb jamæs qen magadure.

8.

Evit gallout en-em doman,
P'en-em zante rivet er goan,
A ispill oc'h eur brancq neuse
C'hen-em vransqelle a zoare.

E ranqe bea sot an den-ze,
Ac etrezo n'er galvent oll
Partout nemet Salaun ar foll.

11.

Erfin, decedet p'er chaf-jont,
En anterri a zecid-jont
Dindan e vezen, dre n'allent qet
En laqât, emezo, er veret.

12.

Nac e binigennou calet,
Nac e oræzon qer brudet,
Tra, emezo, ne doant oll
Nemet ar merq euz eun den foll.

13.

Bref, n'er chavont quet dîn a greu
Da vea anterret e christen,
Ac eno en douar ractal
Er plantont evel ar chatal.

14.

Mæs Doue, à bini ar gallout
A deu, pa gar, à ben à dout,
Evit lezel exempl a squer,
A brouv vertus e zervicher.

15.

Eur fleurdilizen gaër-meurbet
Euz ar bez souden zo savet,
A var e deillou ar chomzou-mâ
O Mari! Ave Maria.

16.

Eur seurt miracl eur vech brudet,
Tud a bep bro zo diredet:
Tud simpl, a noblanç, a bæleyen,
A velet o tond à vanden.

De batissa en-em bressas;
An Ilis savet a zo anvet:
Itron Varia ar Folgoët.

19.

Euz ar moment-ze, cals duqet,
Duqzet, princet, princezet,
D'ar Folgoët zo deut da bardona,
A da Vari d'en-em voesta.

20.

Ac ar pez en deuz c'hoas tennet
D'ar Folgoët cals pelerinet,
Eo au indulgeañcou caër
Enni qer stancq a chonezer.

21.

Er Folgoët mémèz indulgeañc,
A chraçou mémèz abondañc,
Vel zo è Rôm à indulgeañcou
En eur ober e stationou.*

22.

Ouspen an indulgeañcou-ze
Accordet oll gant Jûl trede,
Cals a re-al a gaffen c'hoas
Fontet aman gant tri Bap bras.

23.

Cetu-int amân an tri Bap-ze,
Dalchit sonch mad: Sixt pevare,
Innocant eis a Leon decvet,
O zri d'ar Folgoët devouet.

24.

Da oll bardonniou ar Folgoët
Deja o devoe accordet
Da jamæs cant devez pardon
D'an oll belerinet guirriou.

Ennez eo deiz ar pardon-bras.
Mari en deiz-ze a chanas.

27.

Oh pebez dudi eo guelet
Processionou caër-meurbet
O tond d'ar Folgoët en deiziou-ze,
Evit saludi Mam Doue!

28.

Processionou Lesneven,
Re Plouzeniel a Saut-Even,
Re Knouez ac an Drennec,
Ac ive re Tregarantec.

29.

Tud clan, tud infirm, impotent,
C'hui, pere a guez e drouc Sant,
A c'hui, graguez paour poagniet,
Da Vari-tà en-em voestet.

30.

Er brezellou, var ar mor don,
E creiz an danger, an drahison,
N'ouffac'h qet ober guelloc'h tra
Vit d'ar Folgoët en-em voesta.

31.

Ar branellou a zo chomet
Ac a veler choas er Folgoët,
N'ellont beza nemet mercou
Euz e faveur, e miracloù.

32.

Deut-età oll, à vir galon,
Deut oll gant guir devotion,
Deut d'ar Folgoët da bardona,
Deut da vari d'en-em voesta.

33.

Deut chui pere ne ouzoc'h quet
Da besseurt stad e zoc'h galvet:
Er Folgoët, an Itron Varia
A zesqo deoc'h an hent surra. AMEN.

* Indulgeañcou ar stationou a Rôm,
pere a chonezer en Ilis Itron Varia ar
Folgoët, d'an deiziou, ac oc'h ar chon-
dicionou a zo merqet aman varlec'h:

D'ar c'henta, d'an eil a d'ar pevare
sûl euz an Asvent, indulgeañc à zec
vloas a dec qarantenez.

D'ar trede sûl euz an Asvent, indul-
geañc à zec vloas a dec qarantenez.

Da c'houesper Nedelec, da ofern an
anter-noz a da ofern goulou-deiz, in-
dulgeañc à bemzec vloas a pemzec
qarantenez.

Deiz Nedelec, indulgeañc plenier.

Da vouel Sant Stephan, da vouel
Sant Ian-Nedelec, da vouel an Inno-
çantet, d'an deiz qenta ar bloas, da
vouel ar Rouane, d'an teir sûl tosta d'ar
Choiris, indulgeañc à dregont vloas a
tregont qarantenez.

Da Verc'her-all-Ludu a d'ar pevare
sûl euz ar Chorais, indulgeañc à bemzec
vloas a pemzec qarantenez.

D'ar sûl Bleuniou, indulgeañc à bemp
bloas var-n'uguent a pemp var-n'uguent
qarantenez.

D'ar yaou Amblit, indulgeañc plenier.

Da vener ar Groas a d'ar sadorn
Phasq, indulgeañc à dregont vloas a
tregont qarantenez.

D'an oll deiziou all euz ar Chorais,
qen Sulliou, qen Guelliou, qen Deve-
ziou pemdez, indulgeañc à zec vloas
a dec qarantenez.

D'al sûl Phasq, indulgeañc plenier.

D'an oll deiziou all euz ar sizun
Phasq, a da sûl ar C'hasimodo, indul-
geañc à dregont vloas à tregont qa-
rantenez.

Deiz gouel Sant Marc, a d'an tri
devez Rogationou, indulgeañc à zec
vloas à tregont qarantenez.

D'ar Yaou-Phasq, indulgeañc plenier.

Da gotuerou an Drindet gant gousper
ar Pantecost, indulgeañc à zec vloas a
dec qarantenez.

Da sûl ar Pantecost ac e pad ar
Sizun-ze pen-da-ben, indulgeañc à
dregont vloas à tregont qarantenez.

Da gotuerou Sant Vaze, indulgeañc
à zec vloas a dec qarantenez.

Evit gonit an oll indulgeañcou-ze,
e ranqer ober eur visit d'an Ilis-mâ
d'an deiziou merqet aze diaraoc, ac
ober enni ar pedennou a reer en in-
tationou hon Tad Santel ar Pap:
*pemp Pater a pemp Ave Maria, a pemp
Gloria Patri, a zo suffisant evit gemen-ze.*

Evit gonit an indulgeañcou plenier,
ouspen bisita an Ilis a recita ar pemp
Pater, ac ar pemp *Ave*, ac ar pemp
Gloria Patri, e ranqer choas covez a
communia.

(Rituel de Belley, t. 3, p. 385.)

Eur pratic choas devot ac ancien, a
bepret meulabl ac avantachus-bras-
meurbet, eo recita teir *Bater* a teir
Ave Maria dirac pep auter euz an Ilis-
mâ, n'euz forç pe boënt euz ar bloas,
mæs particulieramant epad nis maë.

(Tradition du pays.)

Propriété de l'Editeur.